

KENTELIOU S. FRANSEZ



KANNAD AR VUHEZ KRISTEN

KOUMANANCHOU

Koumanant ordinal : 30 lur.

Koumanant a enor : 40 lur... pe ouspenn... gant perz e 365 oferenn lavaret bep bloaz evit hor madoberourien.

ADKOUMANANCHOU

1° Evit koumananti a-nevez, roit *atao* hoc'h adress *evel ma oa war an niverenn diweza*, ha ma vez ret, goulennit da-c'houde chench anezi.

2° Ma tegasit asambles koumananchou hag adkoumananchou, dispartiit mat ar re-man diouz ar re-se war ho lizer.

3° Skrivit pep tra fraez, aes da lenn ha da intent.

SKRIVA DA :

P. Eugène LE QUEAU, *Couvent des Capucins*
Roscoff (Finistère) C.C. 291.62 Nantes.

TAOLIT EVEZ MAT...

ouz prizioù nevez ar gelaouenn : 30 lur... ha 40 lur.

AR RE O DEUS PAEET KEROCH...

...a vo dalc'het kont d'ezo eus ar pezh o deus roet.

HA BREMAN...

...skignomp ha skignomp!! Bec'h d'al labour!!



EN HOR BUHEZ LAKAAT DOUE



O veza bet savet gant hor C'hrouer dreist an holl grouadurien all dre hon ene, dleet eo d'eomp beza e servicherien, a bep amzer.

Met madelez hor C'hrouer a zo aet kalz pelloc'h. C'hoantaet en deus hor sevel uhel-uhel. Hor galvet en deus da gaout perz en e vuhez a Zoue, hor galvet en deus da veza e vugale, dre ar c'hras. Hag an dra dispar-se eo a daote an abostol sant Yann en estlamm, hag a rae d'ezan lavarout : « O va bugaligou, gwelit pebez karantez en deus bet Doue evidomp, e vijemp deuet da veza e vugale, e gwirionez. »

Ar vadiziant eo he deus graet d'eomp mont e familh Doue e-unan...

Met, neuze, daoust ha soursi bras hor buhez ne dlefe ket kaout hevelep darempred gant Doue eget m'en deus ar vugale gant o c'herent? Ar wir relijion eo e lakafemp, etre Doue hag hon ene, ar pezh a welomp bemdez, e buhez an tiegezh, etre ar vugale hag o zud : an doujans hag ar garantez.

Youl Doue warnomp eo e welfemp ennan eun Tad, hag ec'h en em gompportfemp gantan evel bugale garantezus.

An dra-se eo ar c'helou mat, eo deuet Jezuz-Krist, eus an Nenv, da zeski d'eomp eus e berz. An dra-se eo labour bras ar vuhez kristen.

Ar pezh zo ar muia trubuilhus, war an douar, eo, hep mar ebet, gwelout, eus eur c'hostez, Doue o c'hervel an den d'e garout, oc'h ober pep tra evit gounit e galon, hag eus eur c'hostez all, gwelout an den o trei kein, oc'h ober fae war ar garantez, hag ar vuhez a garantez a ginniger d'ezan...

Pajennou kenta ar Skritur Sakr a ziskouez d'eomp Doue o tiskenn, e baradoz an douar, da gomz ouz an den kenta, evel ma komz eur mignon ouz e vignon.

Mat ! da gaout eun hevelep mignoniaj, etre Doue hag hon ene, omp galvet holl, daoust petra ' c'hell beza hor stad a vuhez !

An den ne wel ket uheloc'h eget e arc'hant, e gorf, e blijadur, an den, a anve gwechall an abostol — an den aneval — hennez, ne entento morse netra en traou kaer-se. Met ar c'hristen mat — an den speredel — evel ma lavare Sant Paol c'hoaz, hennez a ro plas da Zoue, hag ar brasa ma c'hell, en e sonjou, en e galon, en e amzer, en e vuhez. Beva ' ra, met n'eo ket hen hepken a vev, Doue a vev ennan, Doue a gerz gantan da gement lec'h ma 'za, Doue a gomz outan.

Hag el lec'h beza en anken, el lec'h beza hejet dihejet gant aveliou ar bed-man, ec'h en em sav dreisto, betek an uhelenn ma c'houez warni aezenn yac'hus an Nenv...

Karomp Doue da genta, ya, lennerien gêr, ha lakomp anezan muioc'h en hor buhez.

Karomp anezan a greiz-kalon, dreist pep tra, ha neuze Hen ivez hor c'haro. Dont a raio davedomp, en em ziskouez a raio d'eomp hag e raio d'eomp tanva pegen dous, pegen mat eo beva kalon ouz kalon gantan.

L. B.



War ar studi eo bet

Janjan, lellig e vamm, a zo bet kaset d'ar skolaj, er bloaz-man.

Hag an dud a lavar breman : war ar studi eman Janjan.

Perig, va amezog bihan, a zo aet ivez, er bloaz-man, d'ar skol gant eun tad misioner.

Hag an dud a lavar ivez : war ar studi eman Perig.

Yvonig, va c'henderv bras, a zo er skolaj, pemp pe c'houec'h vloaz a zo.

Hag an dud a lavar adarre, na petra 'ta : war ar studi eman Yvonig.

..*

Ma c'hoarvez gant Janjan chom er gêr er bloaz a zeu, war zigarez n'eo lellig e vamm ha ma kav plijusoc'h beza moumounet er gêr eget beza stag ouz e labour er skolaj... an dud a lavaro : war ar studi eo bet Janjan.

Ma tegouez gant va amezog bihan chom ivez er gêr er bloaz a zeu, netra nemet abalamour n'en deus ket spered a-walc'h da vont larkoc'h... an dud a lavaro ivez : war ar studi eo bet Perig.

Ma chom ivez er gêr va c'henderv Yvonig, pe ma ne gemer ket hent ar velegiez... an dud a lavaro adarre : war ar studi eo bet Yvonig.

..*



War ar studi eo bet!
war ar studi eo bet...!

War al latin eo bet, a lavar plac'h ar presbital, desketoc'h eget ar re all war danvez studioù ar veleien, na petra ta.

War ar studi eo bet! War al latin eo bet! Ha pa zeu an diskan-se gant tud 'zo, e weler war o muzelloù eun tam-mig dismegans hag e santer en o c'homzou blaz trenk ar rebechou.

— Klevet ho peus, eme Vari Bitillig? Chomet eo er gêr... Ne da ket ken war ar studi... Maleürus eo, neketa? Eur paotrig mat evel hennez...! Gwir eo, ar vamm n'eo nemet eur bern ourgouilh. Hi eo a boulze he mab da vont da veleg...

— Mat biskoaz! eme Seza Pouloudig, ne gendalc'h ket ken war e studi! Eur paotrig didrous ha devot evel ma oa hennez! Re zidrous ha re zevot ivez marteze... piou 'oar? N'ouzoun ket gant piou em eus bet klevet e klaske dreist-holl e gerent rei d'ezan deskadurez diwar goust ar re a bae skol evitan.

— War a gonter, eme d'he zro Mari ar Brignenn, eman Yvonig o vont da deurel e soudanenn. Pebez disenor evit ar familh... D'ar vamm an dra-se a raio vat... Distana a raio d'he ourgouilh.

Ma vefe graet hervez Mari Bitillig, Seza Pouloudig ha Mari ar Brignenn, n'hellfe paotr yaouank ebet ken en em lakaat da studia, hep beza e riskl da goll e enor hag hini e familh war ar marc'had.

Dao eo eesa araok kas da benn.

Ret eo kregi er c'hravaz araok he dibrada, poueza ar bec'h araok e zamma.

A-walc'h eo kaout daou liardad skiant-prena evit kompren kemend-all.

Ha setu perak...

mat a ra dilezel e studi ha chom er gêr ar paotrig n'en deus ket spered a-walc'h evit mont larkoc'h war an da-chenn-se;

mat a ra chom e-toull dor ar c'hloerdi ar paotr yaouank a we! mat n'eo ket galvet da vont gant an hent-se;

mat a ra ar c'hloareg pe ar manac'h yaouank n'en deus c'hoaz resevet nag urz na karg, pa zilez e soudanenn evit distrei diwar eun hent n'eo ket e hini...

N'eus aze disenor ebet nag evito nag evit o zud... Bale a c'hellont sonn o fenn... Direbech int dirak o c'houstians ha dirak Doue...

Ne weler o kaout abeg enno nemet an dud a zo tenval e spered, trenk o c'halon ha flemmus o zeod.

An Aotrou Guivarc'h

— Doue d'e bardono!

Parrezig Lamber, kornig-baradoz eus Bro-Leon, n'he deus ket tanvet eul levezeg digemmesk da genver an Ehan-brezel. Rak edo o paouez koll he Aotrou Person karef, an Aotrou Guivarc'h, galvet a-daol-trumm davet an Aotrou Doue, d'ar 6 a viz Mae 1945, a raok tarz an deiz ! N'oa d'ezan nemet 47 vloaz...

Ganet e Mezpaol, an Aotrou Guivarc'h a reas e studioù e kelenn-di kastell hag e kloerdi bras Kemper. Beleg e 1921, e voe kaset da gure da Rozporfen. Tremen a reas goude-se e Pouldergad, e Plouzeniel hag e Plogoneg. Sonjal a c'hellan pegoment a vad en deus graet en holl barrezioù-se, diouz ar pezh en deus bet amzer da ober, dindan pevar bloaz, e Lamber, e-lec'h m'e anavezis.

Bez' en doa kement a oa ret evit kaout degemer mat en eur barrez... nemet ar yec'hed ! Bez' e oa anezan eur Beleg penn-kil-hatroad, hag eur Person madeleuz, hegarat, degemerus, speredek, gredus mat da gemer perz e trubuilhoù e vignoned hag e barrez.

Bez' oa anezan c'hoaz eur Breizad a ouenn vat. Breiz, he Yez, hec'h Istor, he Gizioù, he holl binvidigezioù a oa e vrasa preder, goude e Zoue hag e Barrez.

A re o deus lennet « Ar Vuhez Kristen » hep teurel an distera sell ouz « Sorc'hennou Yann Digezenn » dispaket ha kaset da ludu gant e bluenn skañv ha lemm (hag a sine « Melegan »), ar re se o deus kollet an tanva eus an du-llus ma 'z eo ar Brezoneg etre daouarn gwir skrivagnerien !

Gouzout a ra e rank hior Breiz skedi da genta dra he spered, m'he deus c'hoant beza brudet er bed evel eur vro gristen, evit brasa glour Doue !

Ha setu perak eo e varo eur c'holl evit holl gristenien Vreiz...

Met er Baradoz ez eo, pe e vo (mar plij gant va lennerien !) galloudusoc'h eget war an douar-man gant e nebeut a yec'hed. Ra vezo an Aotrou Doue laouen ouz e ene !

Eun dieour d'ezan

LAOU FRISIVI

War don « An Mini Goz »

Poz

Perak e sellit ouz va fri ?
Ha c'hoant ho pefe d'e zebri ?

Diskan

Che Pebez fri ! Hi, hi, hi !
Che ! Pebez fri ! Hi, hi !

Mar plij, tudou, lezit e fri
Gant e berc'henn Laou Frisivi.

Laou Frisivi ! Hi, hi, hi !
Laou Frisivi, hi, hi !

Perak kement a chlori,
Kement a c'hoarz dirak eur fri ?

N'eo ket eur fri ! Hi, hi, hi !
N'eo ket eur fri ! Hi, hi !

N'eo ket eur fri ? N'eo ket eur fri,
Pa dalv e-unan daou pe dri !

Ya, daou pe dri ! Hi, hi, hi !
Ya, daou pe dri ! Hi, hi !

Alo ! mar plij, resped d'am fri
Ken brao ez eo m'hoec'h eus avi

Resped d'e fri ! Hi, hi, hi !
Resped d'e fri ! Hi, hi !

Emoc'h aze o c'hlaouri
Digare 'm eus eur pikol fri

Eur pikol fri ! Hi, hi, hi !
Eur pikol fri ! Hi, hi !

'Vel eun tour tan e sked va fri
Dindan al loar o lugerni.

Tour tan, e fri ! Hi, hi, hi !
Tour tan, e fri ! Hi, hi !



A-benn ober eur fri sivi
Eo ret mil gwech en em vezvi.

En em vezvi ! Hi, hi, hi !
En em vezvi ! Hi, hi !

Lonka « Pikon », raok dijuni
Ha dek « Pernod » 'raok merénni.

Hag « odivi » ! Hi, hi, hi !
Ha « rikiki » ! Hi, hi !

Eva gwin ruz en eur bredi
Ha gwin ardant goude debri.

Betek birvi, Hi, hi, hi !
Betek birvi, Hi, hi !

Betek birvi ha kounnari
Ha bazata va gwreg Mari.

Paour-kaez Mari ! Hi, hi, hi !
Paour-kaez Mari ! Hi, hi !

Hag he lezel da hirvoudi
Va bugale da zisvouedi.

Na te 'zo kri ! Hi, hi, hi !
Na te 'zo kri ! Hi, hi !

Paoz penn da benn, poaz eo va fri
Mestr oun er park, mestr oun en ti.

Na te 'zo kri ! Hi, hi, hi !
Na te 'zo kri ! Hi, hi !

'Vit hen diskouez, me oar terri
Ar pod houarn hag ar pod pri.

Ha diodi, Hi, hi, hi !
Ha diodi, Hi, hi !

Ganin-me n'eus ket da c'hoari,
Sarrit ho peg ha peoc'h d'am fri

D'an tan ez i, Hi, hi, hià !
D'an tan ez i, Hi, hi !

Kudenn an dilezou.



Da dad, da vamm a enori
Ha da vuhez a a'tenni..
Madou re-all na c'hoanta ket
Evit o c'haout hep gwir ebet...

KLASK AR VAD

E Kerne e oar an holl petra
eo mont da glask ar vad.

Pa varv an tad hag ar vamm
war-lerc'h an dilez, e c'hell ar
vugale o devez bet o lod en ar-
c'hant lakaat istim ar madou a-
nevez evit kaout ar peurrest eus
ar pezh a gredont 'zo dleet d'ezo.
Neuze, koulskoude, e rankont
proui e oa bet roet an danvez
evit ouspenn eur c'hard re var-
c'had mat. Setu ar pezh a anver
« mont da glask ar vad ».

Evit gwelet ha « vad » a vije enno, e prized ar madou,
n'eus nemet eun nebeut bloaveziou c'hoaz, hervez ma tal-
vezent da genver *an deiz a vezé maro an diweza eus an*
daou zonezoner. Ha dek vloaz amzer o devoa ar vugale,
diwar an deiz-se, evit goulenn beza die'haouet.

Breman e ro al lezenn ar memes gwir ivez d'ar gen-
loderien a gred e vez bet graet gaou outo, met an danvez
ne vez prizet mui nemet hervez ar pezh a dalveze e gwirio-
nez, *d'ar mare ma oa bet roet*, hag, e lec'h kaout dek vloaz
fermen evit mont e prosez ouz ar perc'henn nevez n'o deus
mui nemet tri bloaz.

Ha n'eo ket eun dra dizonest, ha control d'ar wirionez
ha d'al lealded mont da glask ar vad?

EO, a dra sur, ma oa ar vugale holl en oad pa oa graet
an dilez ha ma oant bet lezet gant an tad hag ar vamm, da
briza ar madou kenetrezo, ha da denna warno.

Met n'eo ket eur seurt tra eul laeronsi, ha neus aman
netra a-enep ar justis, pa vez istimet an tiegez hag ar stal
gant an tad hag ar vamm hepken, ha roet ganto, en desped
d'ar vugale all pe a-enep o asant, pe c'hoaz pa n'edo ket
ar re-man holl en oad.

Kement-man, siouaz, a c'hoarvez re alies, dreist-holl e
bro ar C'hlaziked. Nag a brosezou er familhou, nag a zizun-
vaniez etre breudeur ha c'hoarezed, nag a dorfedou zoken
etre tud eus ar memes gwad, pa vez ano da vont da glask
ar vad. E parrez K..., daou pe dri bloaz a-raok ar brezel-
man, e voe spontus ar pezh en em gavas en eur familh; di-
rollet e oa ar vugale, trouz ha kann a voe, ha betek mer-
c'hed zoken a voe brevet o izili d'ezo.... Hag arabat kredi
ne vez reuz nemet dibaot a wech war-lerc'h an dilezou...

EVIT KLOZA.

Diaes eo d'ar gerent, a-dra-sur, rei e lod da bep hini eus
o bugale, hep ober gaou ouz nikun, pa vez lezet an douar
hag ar stal-diegez gant unan anezo hepken. Daoust da se,
ne vefe ket mat klask diskara ar c'hiz eus an dilezou, rak
drezo e vez miret er familhou an danvez o deus bet ar re
goz kement a boan o tastum. Evel-se ivez ec'h en em stag
ouz douar hor bro rummadou tud hag a rankfe a-hend-all,
ma vefe gwerzet atant o zad hag o mamm, chom da verou-
rien e-pad o buhez, pe mont d'ar c'hêriou da glask labour,
ha kement-man o distagfe da viken diouz hor maeziou.

Netra a gement a reer war an douar n'eo disi pe barfet,
ha, kaer a vefe sevel lezennou da glask gwellaat an doare
d'ober an dilezou, e kavfed bepred tud da lavarout e vefe
bet graet gaou outo gant o breur pe o c'hoar, pe o zad hag
o mamm.

Ma c'hellfe ar garantez kristen hag an anaoudegez-vat
kemerout e kalon an holl lec'h an erez, ar warizi, ar bizoni
hag ar c'hoant rastellat madou, ne vefe ket ano eus « mont
da glask ar vad », ha ne glevfed ket tud oajet, graet ganto
o dilez, oc'h en em glemm eus dizanaoudegez ha krizder
o bugale en o c'henver.

Salo e teuy an eil da veza trugarezus ouz egile, evit ma
reno an unvaniez hag ar peoc'h er familhou, evit brasa
mad ar feiz hag ar Vro!

KENEC'HRE.

GOUEL MARIA VEURZ

*Eun arc'hel a-berz an Aotrou
A ziskennas eu an Neñvou.*

Nijal a reas dreist ar c'hèriou bras, a-uz d'al leziou alaouret, evit mont betek eun ti paour ha santel eus kêrig Nazareth. Ennan e veve eur vaouez yaouank, Mari he ano.

Bemdez e tiskenn ivez Ael Doue e tiez paour hor maeziou. Mont a ra da gaout tud yaouank umbl ha dister da welet, met en o c'hreiz e lamm krenv o c'halon, entanet ma 'z eo gant karantez virvidik ar Christ.

Hag an Ael da saludi ar Werc'hez : « *Nā gmerit ket aon. Ganeoc'h eman an Aotrou. Genel a reot eur mab hag a vezo Salver ar bed.* »

D'ar paotr yaouank a feiz, d'ar plac'h yaouank a galon e lavar Ael Doue : « Arabat d'eoc'h krena. Doue en deus taolet e sell warnoc'h. Ennoc'h e fell d'ezan diskenn, ha dreizoc'h a-nevez e kalon paianed hon amzer. »

Mari d'an Ael a respentas : « *Penaos e vo graet eun dra ken bras ? — Ar Spered Santel warnoc'h a ziskenno, ha dindan e skeud mamm c'houi a vezo.* »

Dindan an enor graet d'ezan, an den yaouank dibabet gant Doue a respont ivez : « *Piou oun-me evit beza kannad Doue hag e lakaat e kalon va c'henvroiz ? — Kemerit fizians. An Holl-C'halloudek ho kennerzo.* »



*Mari a respontas neuze :
Servijerez oun da Zoue.
Ha Verb Doue 'n em inkarnet
Etouez an dud en deus bevet.*

« Ra vezo graet warnoun bolontez Mestr pep tra, a respont an den yaouank. Emaon prest da senti, ha da senti gant joa. »

Hag en hon touez bemdez e vez renevezet an Inkarnation. Eman Doue o chom e kalon an den.

Oc'h asanti da veza Mamm Salver ar bed, ar Werc'hez a gomprenas e rankfe beva paour, kuzet, disprizet, hag e vefe treuzet eun dervez he c'halon gant seiz kleze.

Soudard ar C'hrist e vezo ret d'ezan ivez stourm ha gouzanv evit e Vestr.

Er c'hrouadur gourvezet war ar plous ar Werc'hez a adore Krouer ar bed; er bugelig a ouele piket gant ar riou. broudet gant an naon, ec'h anaveze he Doue; e micherour Nazareth e wele Mestr galloudus pep tra.

E kalon ar bugel o c'hoari, e kalon an den koz o krena, e kalon al labourer o c'houezi, e kalon an den klanv o c'houzanv, ar c'hristen a wel ivez poltred e Zoue : « Hen a chom ennoun, ha me a chom ennan. »

O welout ar C'hrist o vervel war ar Groaz, e-unan penn, e seblantas d'an holl en doa kollet e amzer hag e hoan. Atao ar Werc'hez a zalc'has fizians en he Mab, hag a gredas e silvidigez ar bed.

En desped d'an enebiez a gav war e hent, diskibl Jezuz a gred e vezo trec'h; daoust ma ne wel ket atao o tiwani an had en deus taolet en ero, e kred e savo eun deiz eost kaer ha puilh diwar al labour glebiet gant c'houezenn e dal ha dour e galon.

An amzer a-vreman eo hadenn an amzer da zont.

Goude an erc'h e teu an heol.

Gant ar C'hrist diskennet en e galon, e reno eun dervez ar stourmer kalonek.

PAOTR NANNE.

Chapeliou Breiz en enor d'ar Werc'hez



ITRON VARIA AR SKLERDED (KOMBRID)

Eul leo hanter eman Kombrid diouz Pont-n-Abad, diouz kostez ar biz. Tour an iliz en deus e istor.

Er bloavez 1675, Nikolaz Euzenou, Aotrou a Gersalaun, perc'henn ar Gosker, a voe krouget ouz unan eus prenecher e gastell gant ar gouerien en em savet diwar-benn ar gwiriou lakaet war ar paper-timbr. An Dug a Chaulnes, evit kastiza ar barrez ha lakaat dere'hel sonj eus an torfed, a lakeas diskar beg tour an iliz hag hini ar chapeliou, gant difenn d'o sevel biken endro. Kant vloaz diwezatoc'h e c'hoanteas parrezioniz Kombrid bega o zour; ar Roue ne asantas nemet pa 'z eas mab bihan an Dug e-unan d'her gouleunn digantan.

Eur c'hard-ur vale diouz ar voure'h, diouz tu ar c'hreisteiz e kavomp chapel I. V. ar Sklerded.

Savet eo bet er XVIth kantved; chenchamanchou a zo bet degaset enni er bloavez 1761 hag adarre er bloavez 1824 m'oa bet tan-gwallet. Wardro 1900 eo bet kresket c'hoaz ar chapel.

En tu kleiz d'an aoter vras eman delwenn goad I. V. ar Sklerded. Eur sae alaouret a zo ganti hag eur vantell marellet a stered. War he dorn kleiz e toug ar mabig Jezuz kurunet.

E tu ar c'hreisteiz d'ar chapel ez eus eur c'halvar, merket warnan ar bloavez 1650. Eun daol vaen a zo outan hag a servije da lavarout an oferenn er maez da genver ar pardon.

E-kichen c'hoaz, eur pezh maen 1 m 30 a uhelder, hag 1 m 10 a ledander; diou feunteun ivez: « Unan eus ar feunteunioù, a skrive er-bloavez 1856 an Ao. Tilly, person ar barrez, a vez disec'het naet gant ar bardonerien; eva a reont anezi ha lakaat an dour da redek etre o diskoaz, war o bruched hag war o divrec'h ».

Ar pardon, darempredet gant kalz tud, a vez lidet d'ar sul a zegouez epad eizvetez gouel ginivelez ar Werc'hez, d'an 8 a viz Gwengolo, er memes dervez gant pardon I. V. Gerzevot en Erge-Vras hag I. V. an Izel-vor e iliz-parrez Fouenant. Setu perak ez eus lod pardonerien hag a blij ganto pedi en teir iliz da genver an dervez-se; setu ar pezh a anver ober **Pardon an Teir Vari.**

Pedet e vez aman ar Werc'hez ouz ar boan daoulagad.

Chapeliou all a zo en eskopti dedlet da I. V. ar Sklerded: e Kernouez, e Plonevez-Forze, Gellejouarc'h, Nevez, Kerien. E iliz parrez Beuzeg-Ar-C'hab ez eus ivez eur skeudenn eus I. V. ar Sklerded hag a vez darempredet kalz he fardon.

Ha breman deomp da Santez-Marin, tri c'hard leo diouz bourc'h Kombrid; eno e treuzimp ar ster Oded evit diskenn e Benoded. Setu ni hep dale e Kloar-Fouenant.

ITRON VARIA AN DRENNEG (KLOAR-FOUENANT)

Ar chapel goz a oa, evel ar feunteun a zo e-kichen, eus ar XVIth kantved. An hini a welomp hirio a zo bet savet er bloavez 1878.

Breman c'hoaz en hon amzer, eo chomet mat e-touez kristenien Fouenant an devoision da I. V. an Drenneg. Diredek a reont niverus d'ar chapel da zeiz ar pardon bras, d'ar sul warlerc'h gouel Maria Hanter-Eost. Da genver ar goueliou all; 25 a viz Meurz, 8 a viz Gwengolo, 8 a viz Kerzu e vez c'hoaz kalz tud wardro ar chapel. Pedet e vez ar Werc'hez evit ma vezo amzer vrag d'ober an eost. Sant Alor, en Erge-Vihan a vez pedet, er c'hontrol, evit kaout glao. Setu ma vez lavaret:

Da Sant Alor 'vit kaout glao

Ha d'an Drenneg 'vit amzer vrag.

E-kerz hanterenn ziweza an XIXth kantved, e teuas parrezioniz an Erge-Vihan da I. V. an Drenneg da c'houlenn amzer vrag. Evit an eil gwech ma 'z eas evel-se e prozesion d'an Drenneg, e teuas da heul parrezioniz an Erge-Vihan, pardonerien eus holl barrezioù kanton Fouenant; 4.000 den, marteze ouspenn, a voe en dervez-se en Drenneg.

Bep bloaz, d'ar sul genta a viz Gouere e vez graet « pardon ar c'hezeg » — eur skeudenn da Sant Alor a zo ivez er chapel. Diouz ar mintin, arack an oferenn-bred eo e vez prozesion ar c'hezeg; awechou e teu betek 300 loen-kezeg d'ar pardon. Arack ar bannieloù hag ar c'hraozioù eo e kerzont. Ne vez nemet gwazed en dervez-se o tougen ar c'hraozioù hag ar bannieloù. Pa vez diblaset ar brosesion, ar beleg a vez o ren ar brosesion a lenn, a vouez uhel, ar pedennoù a gaver e levr-lidou an Iliz evit benniga ar c'hezeg.

Abaoe Santez-Marin n'emaomp mui e bro ar bigouden. Ne weler mui koefou uhel bro Pont-n-Abad, met koefig skanv bro Pont-Aven ha Skaer gant he lasou dantelez tro distro war ar c'hoef, evel eskell digor eul labous, hag ar c'holier bras krizet munut sachet izel a-drenv.

Gant an hent ez eomp eus a Gloar da Fouenant a-dreus glazvez ha gwerjezou, ha setu ni hep-dale er Forest-Fouenant.

TAOLENN INDULJANSOU AN DREDE-URZ. — MEURZ 1946

DEIZ.	GOUELIOU	INDULJ.
1 Gw.	Eus an deiz; evit gouel Hent ar Groaz	A.J. I.L.
5 M.	S. Yann-Jozef	I.L.
6 M.	Merc'her al Ludu	I.L.
9 S.	Santez Katel a Vologn	I.L.
18 L.	S. Salvator a Horta	I.L.
19 M.	S. Jozef	A.J. I.L.
22 Gw.	S. Benvenu	I.L.
25 L.	Gouel Maria-Veurz	A.J. I.L.
26 M.	D. E. Diego a Gadiz, Kapusin	I.L.
28 Y.	S. Yann a Gapistran	I.L.
30 S.	S. Per Regalat	
	Da zeiz ar vodadeg miziek ha tri dervez d'ho choaz	I.L.

HON ANAON. — Langidig : an Itron de Boisanger. — Kleder : P. Milin. — Kollfreg : Y. Sizun.

EUN TAOL-LAGAD WAR VA REOLENN : diwar-benn ar binijenn.

1° — An Iliz ha va Reolenn a verk d'in pinijennou da ober : ar yun hag ar vijil e-pad ar c'horaiz, ar Pevare-amzer, d'an deiz a-raok gouelioù a zo, dreist-holl d'an deiz a-raok gouel ar Werc'hez konsevet hep pec'hed hag hini sant Fransez.

Ha n'em eus ket lezet a-gostez ar pinijennou-se hep rezon vat ebet?

2° — E-touez ar pinijennou, lod a zo merket, goure'hemennet; lod all n'int ket.

Ha n'em eus ket dilezet ar re genta, evit ober pinijennou choazet ganin va-unan, evit ober diouz va fenn, kollet ganin marteze pep merit dirak Doue?

3° — Ha n'em eus bet komzet eus va finijennou evit en em fougeal?

4° — Ma n'hellan ket ober ar pinijennou merket d'in gant an Iliz pe va reolenn, ha klasket em eus, da vihana, beva diouz ar spered ar binijenn, gouzany gant pasianted ha kinnig d'an Aotrou Doue an holl boanlou a zeu d'am gwaska?



Ha c'hoant hoc'h eus da veza santel? Bezit kalet evidoc'h ha mat ouz ar re-all.

(Sant Jerom.)